

## CHANSON

# POTRET PLOUILLAU

Var ton : *Adieu, Pontreo*

M'AM bije speret da gompren evel a meus fantazi,  
Me a vije n'em impliet da zonet da gomposi  
Eur c'himiad leun eus a c'hlac'har, grêt da gons-  
crivet yaouanq,  
O deus tennet ar billet du ebars er blaves prezant.

Ebars er bla mil eiscant c'hoec'h, ar bemp a vis  
guengolo,  
E zeo digueet adare eus a baros Plouillau  
Tud yaouanq evit an arme tud eus ar rederrupla ;  
Giac'haret é o oll ligue, p'o guelont o partia.

Da bartia gant an actif ne zeusqen nemet pévar :  
Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Gailjan ar Mele-  
dar,  
Ha Yannic Prat eus ar Goajou ha Pipi an Aveant :  
Pévar den eus ar re vrava, corfoucaer ha tud vail-  
lant.

Er voanic Jacob a lare en deiz-se d'e gamarad :  
Enar zo an devez trist hac a ra din calonad !  
Guelet va mam baour o vouela, ha va zad qez de-  
solet !  
Va c'halonic ebars em c'hreiz zo dija qazi rannet.

Calz a sonchfe dé, marteze, penos e ven ur pol-  
tron,  
Em be aon rac un ten fuzuil pe rac ur vouled  
canon,  
P'etramant aoun rac ar fatiq, o vale dre an hent-  
chou,  
Pe gousqet var ur guele can ebars er c'hordegardou.

Douguen va dillat var va chouq, va fuzuil ha va  
zabren,  
Bale bemde a guér da guer dre ar fanq hac ar  
vouillen ;  
Ha goule e fin va beach rancout marteze campi,  
Pe gousqet var an douar yen, pe otramant bivoaqi.

Tor o deus an neb a sonch se ; ma c'halent lenn  
em c'halon  
Evit guelet va bolonte ha va inclination ;  
Ma na fotfet nemet va goad, me en scuille tout joaüs  
Evit souten hon Impalaër, un tad qer carantezus !

Piou ne gombatfe qet hardigant un Imparlaër  
christen !  
Ur gaus qer just hac e hiri a zo facil da zouten,  
Pa zomp memprou dn Jesus-Christ, soudarded an  
Aviel,  
Bugale da Zoue an Tad, teimplou d'ar Speret-San-  
tel,

Arçæta camaradet qent quital eus hor c'hontie,  
Demp-ni da illis Plouillau dr suplia hoa Doue  
l'or preservi demeus ueal chanq pa va vezimp en  
armeou,  
Ha da gonsoli bars er guér hon tadou hachorma-  
mou.

Adieu d'éc'h, Autrou Saint Millau, patron eus ar  
baros-mâ :  
Adieu, qerent ha mignonet, cessit brémâ da vouela :  
Pedit Doue bac ar Verc'hes da gavet soign ac'ha-  
nomp  
Hac hon Æl-mad d'hor c'hunduo partout e lec'h  
ma zefomp.

Adieu, va mab va esperanq, eme an tad desole :  
Piou a gonsolo da dud paour goude ma vi partiet ;  
Pa vin accablet gant cosni, me vo clêvet o laret ?  
Ma vije va me mab qèzer guér, en dije va soulajet.

Clêvit ar vam o qimiadi ive digant e buguel :  
Deut amâ c'hoas ma c'hambrassin ur vech qent  
eguet mervel ;  
Aben ma retorni d'ar guér me vo ét eus ar bed-mâ  
Deus amàn etae va divrec'hevil ar vech diveza.

A guichen ar moment fatal ma c'heustennet d'ar  
billet,  
Bemnos vel ma fo jin cousqet, me a seblant da velet  
O tont eus eur gombat sanglant, va eur chariot  
blesset ;  
Pe tolet en eun hospital, gant an oll abandonnet.

Arsoudard yaouanq contristet, c'hoasqent eguet  
partia,  
Evit essât o c'housoli a lavar, en eur vouela :  
Tavit, va zad ha va mam baour, ha bevit en  
esperanq :  
Doue, tad a visericord, a so bras e Brovidanc.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,  
Gant graç Doue hac ar Verc'hes, e vezo fin d'ho  
clac'har :  
Evit merq eus hor vaillantis gant lore deus hou to-  
cou,  
Ni a zistroyo prest d'ar guér evit sec'hi ho taelou.

Adieu da baros Plouillau ha d'e oll habitantet,  
Adieu d'hon oll anaoudeguez, ha qerent, ha migno-  
net :  
Ha ma na nemp qet ar boneur er bed-mâ d'en em  
velet.  
Graz deomp ebars er Barados assambles d'en em  
gavet.

FIN

# GUERZ

VAR SUJET DISTRO UN DEN YAOUANQ

*Partiet gant ar guenta requisition*

Var ton : *Va Flanaden zo caled*

Tostait oll, tud yaouanq, ha qemerit true

Ouz ar blaneden bouner a bouez var va bue ;  
Deut da guemest ho taelou assembles gant va re,  
Da soulaji va foaniou, deut da vœla varne.

Cetu deg vloas tremenet ma zôn bet contraignet  
D'abondou va c'herent, va douc, mignonet.  
Evit monet d'ar brezel da zouguen an armo  
E faveur al liberte voa promettel d'am bro.

Abaoué qeit all amzer, n'alfen qet l'avaret.  
Pet combat ha pet poanion a meus-me anduret.  
Trit c'hant leo am separe eus va c'herent nessa.  
Ha na meus bet dioulo qélou an distêra.

E creiz ar c'harnac'h bemde va buez exposet,  
Unan demeus va diou vrec'h erfin a meus collet,  
Hac evit oll recompanç e meus bet va c'honje,  
Hep receo nep pansion da veva em c'hontre.

C'hoas laouen o tilezel servich ar Republik,  
N'eu deo qet deut va speret da gompren er fatiq  
Eus an hent hir ha poanuis am boa-me da ober  
Aroc guelel va zud qer hac êruot er guêr.

Collet e meus ar gallout da rêi sicour d'am zad,  
Hac o livoeret va brec'h, n'allin mui labourat.  
Brémâ va zud am mago, pa meus-me c'hoas ar  
chang  
M o deus leve hac arc'hant ebars en abondanç.

Cetu me deja êru tostic demeus ar guêr ;  
Gant ar joa ouz va guelel an oll a ray diu cher,  
Va zad, va mam, va c'herent, breudeur ha c'horezet  
Ha va mestrezic fidel a vo oll ravisset.

Bonjour dec'h, ô va c'hontre ! eurus en em gavan  
Gallout c'hoas ho contempli, dont da vervel aman  
Va c'halon gant ar joa vras em c'hreiz zo seziet  
O tostait demeus an ty el lec'h m'ôn bet ganet.

Mes, oc'h antreal enni e zon bet trubuillet,  
Un den dianav din-me en deus din lavaret :  
Eruet fall oc'h amân ; sortiit, va mignon,  
Ne mâ qet ar mestr er guêr, n'ho pe qet aluzen.

Souezet bras o velet n'anaveyen hini  
Touez gentlies personnach a voa o rên an ty.  
E meus-me prest respontel : ententit va rson,  
Me n'en dou qet deut emâ da glasq an aluzen.

Clasq a rân va c'herent qer er plaç m'out Let  
ganet

Al lec'h-mâ e zo dezo, amâ on bet maguet.  
Lavarit din, me o ped pelec'h-en o c'havin ;  
Ne zefot netra qen din evit va c'hontantia.

An den-mâ a zo follet, int commencet erial :  
N'en d'ê qet mab d'hor mestr-ni ; ret eber chasseal  
Guelel ho piçe neuze eur melvellyen  
O tîreded gant bizier d'am chasseal soudou.

O sortial gant glane'har ha beuzet em daelou,  
Da glasq va zud elec'h all, pe clêvet o c'hêlou,  
Eu hen e zon bet scôet vel gant eun tol curun,  
Pa meus-me anaveet voa collet hor fortun.

Sonden a meus rancontret va c'hoar ar yaouanqa  
Eur zac'hic staguet outi, o c'houlou e bara.  
O clasq compren ar maleur va nomp-ni diguezet  
Va speret zo bet troublet, ha va c'halon mantret,

O Doue oll-buissant ! roit din hoc'h assistanc,  
Boit din an nerz da glêvet penos ho Providanç  
En deveus bet permetet, evit va c'hastia,  
Ma zomp-ni bet reduiset er stat an horrupla !

Va c'hoaric paour, me o ped, soulajit va mizer ;  
Hast bras a meus da glêvet quélou deus va zad qer  
Hac eus arvamic tener e deyeus hor savet :  
Mervel a ran eu defot o zerc'hel ambrasset.

Siouas di, va breuric paour ! ne oufes qet com-  
pren

Poguen bras eo hor maleur, peguer brashouanqen  
Allas ! ouспен hor madou a remqomp divoeret ;  
Hor c'herent carentezus zo bet deomp ravisset.

En despet d'al lezennou grêt gant ar Republik,  
Hon tad voa chommet fidel dan Ilis Catholiq ;  
Rac-se gant an tirantet e zeo bet condaonet  
Da bignat var ar chaffot vit bezat dibennet.

Prestic goude, hor madou a zo bet confisquet  
Hac ive, prestic goude, siouas ! int bel guerezet.  
Consumet gant ar chagrin deus qement a gollo,  
Hor mam a vo bet neuze scôet gant ar maro.

Cessit, va c'hoar, d'abarant ; cessit d'andezoll  
Re a meus var an douar a dourmant hac anui  
Er moment mac'h esperen commanc bevas eur u  
En em gavan, va Doue ! myoc'h-mui maleurus

Goude beza servichet ar Republik ingrat,  
E deus, d'am recompanci, guillotinet va zad,  
Laqet va mam da vervel dre an dizesper,  
Ha guêrzet va oll vadou ; n'em bo nemet mizer.

Diouz an tourmantchou garo a stourm ous va  
speret,

Pelec'h caout soulajamant, pelec'h cavet remed ?  
Ar plac'h e deus captivet a bel va zantimant  
A zoulago va hirvoud gant e c'homzou charmant

Varzu ty va mestrezic e zân gant esperanç  
Caout en e fidelite remed eus va souffranç :  
Bonjour d'éc'h, va rouanez ; cetu me deut er vro  
Ancouët eo va oll boanniou, mar am c'haril atao

Me zo FANCHIC, ho mignon, distro eus ar brezel  
Hac a zo en peb amzer chommet d'éc'h-hu fidel.  
Demeus vo oll garantez ebars an hoc'h andret  
E meus bremâ esperanç beza recompancet.

Petra, paour qêz reuzeudic ! clasquit-u em  
c'hever ?

Biscoas ne meus ho quelet, na desirer ober ;  
Biscoas ne meus ho caret, ma birviqen n'er gran  
Ha cetu, em bér gomzou, ho setanç diveza.

Me zo un den maleurus, ne gafet qet e bar.  
Mil guech miliguet an heur mon deut var an  
douar

Oll gouliou va c'halon zo néve digoret,  
O veza bet rebutet gant va muya caret.

Va mestrez ouz va guelel couezet en paourente  
Nije e fromessaou, nije e c'harante  
Espéranç va eurus, allas ! zo tremenet  
Evel ma ra un ure en nôs dre o speret.

An exempl-mâ, tud yaouanq a deu d'oc'h ins-  
trui

Peguen dister ar det-mâ, leun a ingratiri ;  
Epad ma zoc'h pinvidic gant an oll oc'h caret :  
Mes mar tro rod ar fortun... adieu ar mignonet !

Petra rân vab an douar ? collet va mam, va zad  
Va Mestrez ha va madou, va brec'h da labourad  
O vervel pe o veva er c'hoad gant al loéned,  
Rin guell eguet implori amâ faus mignonet !

Er c'hoajou an tevella o tont d'en em guzat,  
Maguet vin gant va glac'har, hac eus va daoula-  
gad

E tîredo an daelou da drec'hi va zec'hed,  
Betez ar moment eurus ma quittain ar bed.

En despet d'an injustiç a eprouvan hirio,  
Me bedo a greiz calon evit boneur va brô :  
O va Doue ! deurvezit renta d'ê ho puissanç  
Ar boneur, al liberte d'am brô guêrus a Franç.